

-- L. LOK --


185

GWERZ

LAZADEG SKOLIDIGOU ITRON VARIA LOURD

MONTROULEZ

29 a viz genver 1943



BREST

Moulerez, 4 ru or C'hastell, 4

1943



**Hervelina LAURENT
C'hoar saint CYR**

Leanez ar SPERED SANTEL

Merc'h da JOZEF ha da Vari BONDERFF
ganet e Plouenan (Bro Leon)
d'an 20 a viz ebrel 1912

Aet da anaon
a-unan gant nao ha tregont eus he skolidigou
Devez bombezadeg Montroulez
d'an 29 a viz genver 1943.

*Pedit ma vo Doue
Laouen ouz hec'h ene.*

- L. LOK -

GWERZ

LAZADEG SKOLIDIGOU ITRON VARIA LOURD

MONTROULEZ

29

a viz genver

1943

Naontek kant tri ha daou ugent,
An nao war 'n ugent a c'henver,
Da ziv eur ha kard, da wenər,
D'anaon ez int aet daou ugent:
Skolidigou hag o mestrez
Eus skol gristen Lourd Montroulez.
Kalz re all a zo bet gloazet;
Er c'hlas eur bomb a oa kouezet.

AR GAOUED FLASTRET

Va c'halon baour a zo sezet:
Va merc'h vihan zo bet lazet.
Lazet eo bet gant eur sparfel
War zigarez ober březel.
Sailha garo war evnigou :
Eur gaouedad bugaligou,
Bodet en o skolig
Evel en eun neizig,
O teski digant o mestrez
Lezenn gristen ar garantez!
Jezuz a lavar: « Bugale,
'N em garit an eil egile;
Karit ho mamm, karit ho tad,
Karit ho nesa e pep stad.
Na rit ket d'ar re all
Eun dra hag a ve fall.
Pedit Doue hag ar Werc'hez
Da lakaat diwez d'an enkrez
War ar bed holl, hizio, ledet.
Ho pedenn c'hlau vo selaouet.
Grit ganen: « Er ano an Tad »,
Eun tarz!... flastret ar gaouedad.
Daou ugent a vugaligou
Zo bruzunet o relegou.
O sparfel griz zo ac'hanout!
Perak ? ya, perak seurt darvoud ?
Kañv war da lec'h ha netra ken;
Tadou ha mammou en anken,
Breudeur, kerent ha mignonned
O c'halon en daerou beuzet.



NIJADEG AR C'HOULMIGOU

Ar c'helou hon spontas;
An Neñv a druezas.

Ganto roz ha lili, skourrou palmez, raktal,
Aelez ar Baradoz a voe ouz o gedal.

— Petra 'zo nevez 'ta, hizio, er Baradoz ?

Perak en em vodit? 'me Sant PER. Pe venoz
O laka, ken joaius,
Da zont, ken niverus,
E tal va dor
War c'hed digor..?

— Ha ne welit-hu ket o tont, a denn-askell,
Eus a du ar c'huz-heol, eus a vro Vreiz-Izel,
Eun nijadeg koulmigou gwenn
Gant eur vammig koulm en he fenn...?
Ne glevit ket o c'hanaouenn..
Pegen dudius, pegen laouen !

« Jezuz, pegen bras e
Plijadur an ene
Pa vez e gras Doue
Hag en e garante..!

Tenn e kavomp kuitaat,
Ken yaouank, mamm ha tad.
Aelez, roit d'eomp digor,
Ma vezimp er goudor.

Bremañ, war an douar,
Ez eus reuz ha glac'har,
Bemdez trouz ar brezel,
Kañviou e Breiz-Izel.

Met karantez a oa
War an doan o skuilh joa.
Ne viot ankounac'haet
C'hwi ho peus hor c'haret.

Na leñvit ket, tadou.
Mammou, peoc'h d'ho taerou..!
Ni a vo dizale
An eil gant egile.

Hor c'horfou a zavo
Da veo eus a varo;
Ni 'zo ouz ho kortoz
E gloar ar Baradoz. »






ER BARADOZ



Pebez digemer kaer ' voe graet d'ar c'houlmigou!
A-hed o hent bleuniet 'voe kanet kantikou.
Itron Varia Lourd d'o diambroug deuas;
Ar gaouedad en-dro d'ezi hi a vodas
Evel m'edont renket e skolig Montroulez.
« N'ho tispartiin ket, emezi d'ar vestrez.
Merzeriet a-unan 'vit Doue hag ho pro,
A-unan ho pezo digoll eus ho maro.
It, holl, en-dro d'am Mab; kreskit e gurunenn.
Bezit, gant an Aelez, evurus da viken. »





OFERENN AN AELEZ

E bered Sant-Varzin e voe toullet beziou
Da rekour relegou ar vugaligou geiz.
An Neñv a zigoras d'ezo, holl, e zoriou.
Setu m'o deus kavet, eno, adarre neiz.
Digemeret int bet gant Doue heb dale :
Rouantelez an Neñv a zo d'ar vugale

D'ar re a zo

Henvel outo.

M'hon eus, war an douar,
O gwelet, gant glac'har,
Diouzomp o kimiada,
Hon eus klevet lida,
Gant an Iliz he levenez.

« Evurus int gant an Aelez. »
(Na marv-skaon trist, na dillac du,
Mes liou ar c'hlanded a bep tu.
Himnou laouen d'hor frealzi.)
« Perz a gemeran, emezi,
E joa ho pugale gristen.
Evurus int da virviken. »



KENAVO ! FILHOREZIG

*E koun va merc'h vihan
ha filhorezig karet.*

Va c'halon baour a zo sammet
Gant ranngalon. Va filhorez
Diganen a zo bet lamet
D'ar baradoz gant an Alez.

Me ne welin ken he dremm goant,
He daoulagad du ken digor
Ma ouien enno lenn he c'hoant
Da laerez diganen tenzor
Va fokou, va madeleziou,
Da bellaat va zamalligou.
« Ro d'in, Pepe, eur pokig trouz;
Fur e vezin; 'rabat gourdrouz. »
Ne glevo ken trouz va fokou.
Falc'het eo bet gant an Ankou.

He mouez lirzin
Ken ne glevin
O tistaga « Pepe, Pepe ».
Distera poan he deveze,
Gant spi beza dienkrezet,
Eus pep droug beza diboaniet.
« Pepe, iveau, gant c'hoant ranna
He joa, zoken ar vihana.
Ha « Pepe » d'am digounara
Pa gaven tro d'he skandala.
Gouzout a ouie, ken sioulik!

Gwaska mat war va c'hizidig.

« Kana 'rin d'id « Marivonig » ?

An « Angelus » pe eur c'chantik ?

Ar « Vro goz », « Kousk », ar « Yarig wenn » ..?

Kan d'in, Pepe, ar ganaouenn :

« Ne 'z eus ket e Breiz, nann, n'eus ket unan,
Nann, n'eus ket eur sant evel Sant Erwan. »

Ha ken n'he c'hlevin

O kana lirzin

Gwerziou, soniou na kantikou.

Falc'het eo bet gant an Ankou.

Doaniet da dad, doaniet da vamm,

Da vreur, da c'hoar; n'ehanont tamm

Da leñva d'id. Ha pebez bec'h

War o c'halon : Drailhet o merc'h !

Eus he c'horfig ne chom netra.

N'he deus bez d'in da zaoulina.

Kenavo 'ta, filhorezig.

Chomet 'z eus ganen eur pokig :

Pokig ar c'henavo.

Espernet d'id e vo.

Ouzin ar maro a dosta.

Roet 'vo d'id dizale 'ta.

Klevet a ran strakou

Karrigell an Ankou.



MAMMIG KOULM, BETEK MERVEL !



Kenavo, c'hoar Saint CYR. Eur gaer a gurunenn
Ho peus, c'hwi, gounezet: Mervel war an dachenn,
E kreiz ho skolidi hag epad ar gentel,
Kentel a beoc'h, zoken en hon amzer vrezel
A-greiz deski d'ezo peurgaerat o ene
Evito d'en em gaout e baradoz DOUE,
Abred pe ziwezat, met den ne oar peur..!
Lezenn ar c'hatekiz a oa he c'hentel veur.
Pep abardaez gwener eo e veze desket.
Eun abardaez gwener, Doue 'n deus he galvet
Ha galvet ouz he heuilh he skolidi garet.
Chom hepdo, war o lerc'h, a vije bet kalet.
Ne c'helle kaout digoll kaeroc'h evit he foan.

Sonjal e kement-se a louzaoua o doan
D'he zud ha d'he c'herent ha d'he mignonezed
Ha da gement hini en deus anavezet
An Dimezell LAURENT, ar skolaerez kristen,
Eus Skol Lourd Montroulez, maro war an da-
[chenn.

URZ ar Spered Santel n'eman ket en anken:
Choar Saint CYR he deus bet eur gaer a guru-
[nenn.



KALONAD

Da c'hortoz en em gaout ganto holl, hor bezo
Tro da vaga ennomp kalonadou c'houero.
Kant ha kant tra bemdez hon lakay d'o c'heuzi :
Na kannou, na tabut, trouz ebet d'argarzi!
Shoulder an ti, breman, eo a ra d'eomp-ni poan.
Goullo 'vez penn an daol da vare lein ha koan.
Goullo 'vez o gwele. Pa deu poent ar c'housked,
Pedennou hon aelig ne vezont ken klevet.
Diouer bras a ra d'eomp pokou a garantez
A hete eun noz vat hag eun deiz mat bemdez.
Aman eman, direnk, ar bern c'hoariellou.
N'omp két evit teurel warnezo hon sellou
Heb na skofe eur flemm betek poull hor c'halon.
Sonj o c'hoarzou lirzin a zo trist o zason.
Ahont, er c'hornig all, eman eur re vontou;
O c'hilhou zo nevez ha nevez o zachou.
Pebez fouge ' veze gwiska boutou nevez!
An aon d'o c'hailhara ne bade eun devez,
Kement e vez ebat o bourbouilha an dour.
C tizenti eun tamm e veze kavet saour.
Da vale er bed-man ez eo ret kaout boutou,

Kement a vein, a zrein a zo war an hentou.
Hon aeligou, breman, a c'hell mont diarc'henn,
War bokedou dizrein e reont o redadenn.

Ar streajou m'edomp boaz, drant, enno da bour-
[men,

A zeblant beza trist, pa reomp di eun tremen,
Beza e kañv ivez. Emaomp' war c'hed klevout :
« O pebez bleuenn goant! Kuntuilh d'in ar bezvoud.
El letonenn, aze, nag ez eus a vleuniou!
Hag ahont-ta, er prad! Ma 'z afemp d'ar c'bleu-
[niou!

N'eo ket poent an neiziou, c'hoaz, gant al labou-
Ar c'houkou o kana peur e vez o klevet? [sed?
Peur e vo kraonkelvez, e vo du ar mouar ? »
Liou al louet a zo gant kaerder an douar,
Ha kerse a gavomp d'ar goulenou ken stank
A rae, ouzomp, dalc'hmat, hor bugale yaouank.
Karout a rafemp, c'hoaz, klevout « Perak, petra,
Penaos ha peur ha piou? » diwar mil ha mil dra,
Ha beza torpennet, beza lakaet nec'het
Gouzout, dre hor respont, digeri o spered.
Digor splann, eo, breman, spered hor bugale
War berag ar maro ha perag ar vuhe.



CHAPEL AN AELEZ

Truez am eus ouzoc'h, o tadou, o mammou!
Nao bugel ha tregont, en o zouez koubladou,
Merzeriet en o bleunv! ha c'hoaz n'eo ket hor
Skrijusa mortuaj a gavfed er bed holl..! [roll
E pep den a galon, ken euzus gwalleuriou

À enaou kasoni ouz an holl vrezeliou.
Eurus a re a gred, evit o frealzi,
N'eo ar vuhez nemet eun hent berr da dreuzi.
En dibenn-hent emañ ar re o deus karet
Hag e vezint, eun deiz, adarre holl volet.
Mantrret gant ar glac'har, nec'het gant ar skoilhou
A gavimp c'hoaz, hep mar, o stroba hor seuliou,
Digrant hon aeligou e c'houleñnimp skoazell.
Gounezet 'vez Doue gant pedenn eur bugel.

E koun hor bugale ni' savo eur chapel,
Eur baradozig koant, war an douar santel
Bet glebiet gant o gwad, a zo gwad hor gwad
[d'eomp.

Aze 'mañ penn an hent o deus heuilhet, sur omp,
Evit en em gaout, holl, e palez an Neñvou.
Aze, eus hor c'halon, e savo pédennou,
Elazet a garantez, gleb alies a zaerou,
War-du hor bugale, betek o c'halonou.
P'en em gavint ganto, tridal a raint laouen
Evel m'o deus tridet, p'edont war hor barlenn.



PEDENN D'HON AELIGOU

Ken tost all da Vari, hor Mamm garantezus,
À danvas en hor raok c'houervoni ar glac'har
O welout merzeria he Mab war ar C'halvar,
Pedit-hi da veza ouzomp-ni truezus,
Da lakaat, war ar bed, ren abred ar gwir peoc'h
Ha d'hor sikour da vont d'ar Baradoz ganeoc'h.

A ZO AET DA ANAON

LAURENT Herveline, C'hoar Saint CYR, leanez ar SPERED SANTEL, merc'h da Jozef ha da Vari BONDERFF, ganet e Plouenan (Bro Leon), 20 a viz ebrel, 1912.

ABGRALL Andrée, ganet e Montroulez, 2 mae 1936.

ABGRALL Guy, ganet e Montroulez, 10 ebrel 1937.

Breur ha c'hoar.

CORRE Jacques, ganet e Montroulez, 3 c'houevrer 1937.

CORRE Monique, ganet e Montroulez, 15 ebrel 1938.

Breur ha c'hoar.

AUBIN Annie, ganet e Montroulez, 19 gouere 1937.

BERLIVET Yvon, ganet e Montroulez, 26 mae 1937.

BERRIGAUD Raymonde, ganet e Montroulez, 16 here 1936.

BERTHOU Bernard, ganet e Montroulez, 30 meurz 1937.

POURVEN Jean-Claude, ganet e Plourin, 13 gouere 1937.

ERAS (LE) Constance, ganet e Sant-Varzin Montroulez, 1 here 1937.

CAOUDAL Jeannine, ganet e Bulat Pestivien, 23 ebrel 1936.

CAROFF Yvon, ganet e Montroulez, 18 gwengolo 1937.

CHAPEL Yvonne, ganet e Lokournan-Leon, 15 gwengolo 1937.

COQUIN Jean-Jacques, ganet e Montroulez, 22 gwengolo 1937.

CORLOSQUET Andrée, ganet e Brest, 5 du 1936.

CREISMEAS Marie-Louise, ganet e Montroulez, 28 ebrel 1938.

CUEFF Marie-Louise, ganet e Sant-Varzin Montroulez, 4 ebrel 1937.

DECOCK Willie, ganet e Tourcoing, 8 even 1937.

FLOC'H Marcel, ganet e Montroulez, 28 gouere 1937.

FRABOLOT Roger, ganet e Montroulez, 18 meurz 1937.

GALL (LE) Alain, ganet e Montroulez, 5 mae 1937.

GIGOUT Françoise, ganet e Paris, 24 kerzu 1935.

GUEZENNEC Michel, ganet e Montroulez, 28 kerzu 1937.

CUIOMAR Patrick, ganet e Montroulez, 2 even 1937.

JEFFROY Louis, ganet e Montroulez, 29 ebrel 1937.

JEUNE (LE) Christian, ganet e Montroulez, 30 even 1937.

MARTIN Jacques, ganet e Montroulez, 23 mae 1937.

MENN Jean, ganet e Montroulez, 2 gouere 1937.

PAUGAM Robert, ganet e Montroulez, 5 ebrel 1937.

PAYAN Hughette, ganet e Montroulez, 24 c'houevrer 1937.

PENDU Nicole, ganet e Montroulez, 14 meurz 1937.

PERON Jacques, ganet e Montroulez, 15 mae 1937.

PLANTEC Jean-Claude, ganet e Montroulez, 21 c'houevrer 1937.

POUTREL Sylvette, ganet e Sant-Mark, 1 even 1937.

PREIS François, ganet e Montroulez, 20 kerzu 1938.

ROUX (LE) Marie-Pierre, ganet e Landivizio, 8 here 1937.

SAHNER Claude, ganet e Montroulez, 25 even 1937.

SALOU Andrée, ganet e Montroulez, 17 c'houevrer 1937.

THOMAS Jean-Yvon, ganet e Montroulez, 17 kerzu 1936.



Aotre da voula.

16 Kerzu 1943.

P. JONCOUR, *Vikel-vras.*

A ZO BET GLOAZET

C'hoar SAINTE ADELAIDE, leanez ar Spered Santel.
BRICON Michel.
CAOUDAL Michel, breur da Jeannine.
CORBEL Jean-Claude.
CORVIN Paul, breur da Jean-Jacques.
COZ (LE) Guy.
DECOCK Monique, c'hoar da Willy.
GLORENNEC Hervé }
GLORENNEC Pierre } breudeur
HERRY Michelle.
JAOUEN Armand.
MILL Claude.
NORMAND François.
PAUGAM Michel, breur da Robert.
QUITTE Yvon.
RAOUL Annick.
RIGOUS Etienne }
RIGOUS Jean-Claude } breudeur
SANN (LE) Marie-Françoise.
THOMAS François, breur da Yvon.



Lakaet ez eus bet moula 1000 levrig Gwerz Lazadeg
200 anezo a zo moulet war baper dreist ordinal
An arc'hant savet diwar o gwerza
A dalvezo da baea ar mizou sevel
Chapel I.-V. an AELEZ
E Sant Varzin Montroulez
War al lec'h m'edo ar skolig.

